

## Traduction libre du poème "A la très Sainte Vierge, ma céleste Protectrice" d'Athanase Vantchev de Thracy en langue bretonne

par [Fabriz Coupechoux](#) , lundi 26 mars 2012, 13:07 ·

D'ar Werc'hez santel-meurbet, va Diwallerez selestiel

.

O mamm va Doue,

Da anv zo kaer, ha dous, ha tener

Da 'm c'halon,

Evel ma vez brañselladeg a-unan

An tulipez el liorz.

.

E skrivañ a ran war gwennder ar folenn,

Ha zo eürus gant da zonedigezh em zi.

.

Te zo lorc'h eurioù doubl

An devezh,

Tan soutil an danveziou.

.

Te zo, Gwerc'hez Karantez Doue,

Gwad ha c'hwezh an neñv

A dremen, noz-deiz,

Em gwazhied

Hag em c'homzioù.

.

Te zo, Mamm,

Ar vuhez a neizh

E skourroù c'hwezet mat

Va hun.